

158

Var maro an Autrou David,
 Bêleg en Gharlan.
 29 eus a vis Goengolo 1844.

(168)

Gharlanis christenien, ret eo - ta divoeret
 Euy den a voa ger mad ha gant an oll caret !
 Oh naovet - varnuquent eus a vis Goengolo !
 Te vo present atao en memor tud ar vro .
 Epad eun amzer hir a zouffrançou meurbet,
 An Autrou ger David gant calz paciantet
 En deveus bet atao presentet da Doue,
 En expiation, e gorf hac e ene .
 Distag eus ar bed - man, en creiz e oll boanniou,
 E zellou truezus stag varzu an ênvou
 Hac e zaouarn joentret, e pede a galon
 Gant eur fervor meurbet ha quir gomponction
 Hor Zalver souverey da receo e ene
 Goude e oll boanniou en e bales en êe .

Plijet, ô va Doue ! accordi e vennad
 Da eun den voe d'an oll en heb amzer ger mad !
 Doue madelezus en deus en exocet
 En eun deiz memorabl erit mont d'e gavet :
 D'ar zul, da zeiz e vouel, Gouel Arc'hel Sant Migel,
 Eo nijet e ene d'al lez celestiel
 An deiz varlerc'h e voa en em gavet present
 Uguent bêleg eno vit e entêramant .
 Eur bobl niverus bras voa n'em rentet ive,
 Ze a dlejet deân, rac an oll er c'harnie .
 En sal ar presbital e voa 'r c'horf exposet,
 Aroc bea casset da vea entêret .
 Euy nombr bras eus a dud voa o pedi eno
 Hon Doue da receo ene an den maro .
 Remercout a rejot, daoulinet d'an douar,
 Euy den yaouanc mantriet gant ar brassa glac'har ;
 Gant eur fervor quirion e rê e bedennou
 Dirac an den maro, o leusqel hirvoudou,
 Pa zavas en e za, e voele meurbet druz :

(169)

— Da gaelou ac'h enor, den yaouanc generus!
 Te voa mignon ive d'an hini a geuzomp :
 (110) A galon gant da re hon daelou a vescomp.
 Heuilomp breman ar c'horf gant gñir devotion ;
 Pedomp evit repos e ene, a galon ;
 Mescomp ho[?] pedennou gant re ar vèleyen,
 Gant ar brassa fervor, evel gñir gristenien.
 Antreomp en ilis, leun a dristidiguez,
 Suppliomp eun Doue leun eus a vadelez
 Da receo en e c'hraç eun den hac a garric
 Renta servich d'an oll etropad e vue.
 Echu eo an ofiç... Ar c'horf a ya d'ar bez ;
 Heuilomp oll anean, ha pedomp a ur vouez.
 Er gñelet a reomp vit ar vech diveza :
 E zoar en e arched ouz en diargeza :
 Laçet eo en douar... Adieu vit eur james,
 Mad-oberour d'ar paour etropad da vuez.
 Etouez da vignonet zo n'em gavet amã
 Da bedi evidout, Person ar barros-mã
 Zo bet dide ive, ni er goar, eur mignon :
 Eveldomp e carric ac'hanout a galon.
 Dorn Doue en devoa da gunduet deãn :
 (111) Da anaoudeguez voa ar brassa evitan.
 Goude beza santet a drubuilhou ar bed,
 Evel eun hillon e voas en em staguet
 D'ar Person generus, pini n'en d'oa qen c'hoant
 Nemet o clasq bepret dont d'as renta contant.
 Ganec'h ho taou e meus alies bet comzet :
 Va c'halon bars en c'hreiz a voa joais meurbet,
 Pa deuen d'ho selon an eil hac equile
 O veuli a galon madelez hoc'h ene.
 Oh ! Garlanis, tud vad, goude bea pedet
 Evit repos ene hor mignon decedet,
 Pedit ive Doue evit ho Pastor mad,
 Zo, da dud e barros, eur mignon hac eun tad ;
 Reçetit ouz Doue ma vero pell amzer
 Evit o poneur oll eun den zo dec'h qen qer.

30 quengolo 1844.
 Eur gñir Vignon d'ar A. David. Lⁿ